

Rummen 19. — Bloavez 2

Miz Gwengolo 1905.

# AR VRO

KELAOUENGELC'H

MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN ÈRE  
ETRE

AR VRETONED



*Sedha an heol avar o sevel  
Kag o tinnill war Breiz-Izol.....  
Caldiz*



Priz eur Rummen :

**5 GWENNEK**

**KOUMANANCHOU :**

Breiz ha Bro-C'hall : 14 real

Breiz-Veur ha lec'hiou-all : 20 real

En Gwerz en holl Stallou Leoriou gwir vreton

# AR VRO

Penn-Rener :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »  
**Tennet deuz Aliou mad Sant KADO**  
*(Myvrian Archeology, levr. III., d. 10, rimel, 3.)*

KRENNAD :

Aliou  
RENADUR AR GORSEDD  
 IX<sup>ved</sup> Kendalc'h  
A. M. R.  
 Efflam Kerzenan  
HENORET  
 Ar Gador Brezek  
EUR PERSON  
 Sonj ar Gear  
POTR AR C'HAP  
 Huanadou  
AR BRUGER

KRENNAD :

la me gano  
AR C'HOZIK  
 lez ar C'helled  
MATHALIZ  
 Al Lann  
LOIZ PORZ-IZEL  
 Dihunamb  
BLEIMOR  
 Jelvestrik, tragedien  
AN ARC'HANTEK  
 Leorlennadur

## ALIOU

D'an Dud Iouank a c'hoanta bea graet  
 Barzed en Kastell-Paol

Arru eo hep dale ar mare evid Gorsedd Barzed Gorenez Breiz-Vihan da zigemer, evel bep bloaz, eun nebeut barzed nevez e-pad Goueliou Kastell-Paol.

Setu-ama araok, ar c'huzuliou a zo roet d'ar gederien iouank gant Renadur ar Gorsedd.

\* \* \*

An dud iouank a c'hoanta dond ebarz ar Gorsedd a dle gouzout penoz ec'h eo hema eun ober poellus evit pehini eo red darevi ar skiant, mirout eur galon barfet ha labourat gwellaour an ene. Dleet eo d'ezo distrei deuz an disunvaniez, beza helavar, jacha d'o zu, dre skouer vad eur vuez eeun, kement a zo er vro a sperejou braz hag a benn-rener kevredigez.

Red vo d'ezo ober ma vezo o hano a varz respetet er vro-ma, evel ma ec'h eo en Keumri.

Evit rei pouez d'hon c'homzou, ni a ziskouezo d'ezo urzou an Triedou hag a raio d'ezo stoka o biz ouz oberou peurbaduz Barzed Bro-Geumri. Ar re-ma, mar dint deut a benn da drec'ha war an amzer ha war an traou ar muia diez, n'eo nemed dre ma lakchont o c'halonder uz do zinerzded an den.

Kaëra histor ec'h ouffemp lenn eo hini o doareou-mad, heuillet hep paouez, hag hep fazia a dreuz d'ar c'hantvejou, hini o furnez doun, o ioul difezuz, o c'harante hep beven hag o diezom seder ouz a bep tra. Eur burzud hep ehan eo o labour dalc'het a viskoaz uz da labour an den. Mez n'eo nemed dre gement-se mar int deud abenn da drec'hi war an hegas, an heskign, ha da virout, pell deuz an taoliou, herez zakr hon tadou.

Red eo eta d'ar Varzed iouank, pere n'o deuz ket ama gwareoniezh an ezeli oajet, diskouez ec'h int kab da dremen diouti. N'arrufont da ze, nemet dre fors 'n em sevel uz d'o oad, o veza fur en o c'homzou hag en o oberou, hag en eur disklaeria o c'harantezh evit ar gwir en o skrijou hag en o c'homzou, evel ive en o buez.

Dond da veza barz ec'h eo dilezel pep follentezh ar iouankiz, hag ar peurvuian deuz e flijadur. Dond da veza barz eo ober al le da dostaat ar muia ma heller d'ar c'haera skouer-den, en eur wellaat e vuez hag e skiant.

Mar arrufe gant unan bennag deuz ar re a zeu ebarz ar Gorsedd nonpaz bea zur mad deuz an ezom-ze, henez a welfe abred penoz na man ket e lec'h ebarz ar Gorsedd. Ar Gorsedd a dle kentoc'h digemer nebeud a dud vad eget digemer kalz a dud dibenn, mar na fell ket d'ezan koueza buan. Na dle ket kemer hepken rimaderien, mez ive, ha war an hevelep renk, an holl sperejou uhel.

En berr-ha-berr, ni 'hadlavar penoz ar Barz n'euz dever ebed brasoc'h evit hema : Klask e welladur evel den hag evel breur d'ar bobl. E labour keltiek n'hall ket beza mad hep-se.

Dleout a ra lakaat 'n e benn an holl doareou 'zo deut d'emp abeurz hon tadou a dreuz d'an amzer. Na dle ket

karout eun amzer muioc'h eget eun all, na zakrifia netra d'e c'hoant e-unan.

Hon holl doareou koz a dle kaout euz hon feurz an hevelep doujans hag an hevelep karantezh.

III

RENADUR AR GORSEDD.

## IX<sup>ved</sup> Kendalc'h Kastell-Paol

— Da Varzed Breiz-Izel —

An heol 'zo lugernuz hag an oabl a zo skler  
 Klevet a ran dre oll o tiston barz an aer  
 Iouc'hadennou lirzin ; Breiz a zo dihunet  
 Aboue kanvejou-ze e oa chomet kousket.

Ar moueziou a glevan a zo moueziou Barzed  
 Trital ra ma c'halon p'ho c'hlevan o toned  
 Demeuz pep korn ar vro, ar menez, an draonien  
 Deuz kear ha var ar meaz e zavont a vanden.

Kanet, Barzed iouank, kanet a vonez uhel  
 Ho kwerzio dudiuz en enor Breiz-Izel  
 Sonet ho Telen dir a oa pell zo melget.  
 Me gred d'ar re vouzar tigasset ar c'hlevet.

Ar zon skiltruz ha drant a za var an avel  
 Dreuz d'al lann, d'ar menez, dre-holl en Breiz-Izel,  
 Bord ar c'hoat hag an od ha memez dreist ar mor  
 Ken eo chomet batet ho preudeur a Dremor.

Mez ! tal d'in e klevan eur vouez o hirvoudi  
 Mouez eur barz iouank eo, en devez melkoni  
 O weled a zo tud hag a garfe diskar  
 Hon gizioù hag hon iez ken kaer var an douar.

Na hirvoudet ken, Barz, ar Feiz n'eo ket maro  
 Me wel ar Vretoned o vond d'ar pardonioù  
 Lod 'zo var o zreid noaz, 'n o dorn eur chapeled  
 O pedi Sent ar vro en gwir belerined.

Me gred ho deuz kavet en eur c'horn an dachen  
 Roudou o zadou koz en kichen eur peulven :  
 Neuze c'hint daoulinet da ganan, da bedi  
 Ha da c'houlenn pardon 'vit ar re a fazi.

An hanv gant e gaërder hag e vleuniou brava  
 Roï kalon d'ar Varzed ha mouez evit kana :  
 Sevel a refont holl gwerzioù leun a vaillanz  
 Ha pa vo deut an deiz o devo rekompanz.

Labouret, tud iouank, labouret vit ar vad  
 Vit Doue hag ar vro, me reket d'ec'h mennad  
 Da sevel Breiz-Izel a uz d'ar broioù all :  
 Kendalc'het d'hi difenn a eneb an dud fall.

A. M. R\*\*.

# Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

*Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).*

**Kendalc'h**

— Marfad e kerez c'hoaz al leverioù... en li an aotrou Person, e kavi ar pezh a gari ha pa vi skwiz o lenn, bea zo aze eur fuzul; Medor ive na c'houlenn ket well evit mont ganid da chasseal... En pad an noz a oa deut d'en em frotta dimeuz dor da gampr, ken a meump ranket zevel, evit ampech anean da zifuni ac'hanout...

Aze en dro da rivier zant Nikolaz a zo gedon, glujuri, ha lapined aleiz; evit tud kuztum da weled traou kaer Pariz, ze a zo neubeud a dra... A vechou, me garje bea pinvidik, evel eur rouanez, evit galloud rei did, aleiz he norioù ha madou! ..

Ha koulz koude, pa zonzjer en plijadurezou ar bed man, na n'int netra? Ker buan e tremenont! Benn eun toullad blavejou aman a weli ive, pegen buan e tremen an amzer!

Na meump nemed eun neubeud amzer, eun toullad blavejou da veva var an douar man, da betra lezel hon c'halon da vont trezek ar blijadurezou ze, ha na lezont, var ho lerc'h, nemed tristidigez, ha kâz deuz ar vuez man.

Ha pa zono evitomp an heur diveza, daoust ha hen na vo ket engall deomp pe bea bevet trankil en hon bro, pell deuz trouz ar c'hearioù, o labourad douar hon tadou, pe bea zavet er renk huella?

Savet, em iaouankiz, en mesk ar binvidigez, al lorc'haj, an traou ze a blije d'in kenan; dre ma teuaz d'in an oad hag ar skiant, ma c'halon a glaske ar peuc'h, al lec'hioù distro.

Hag eun devez! devez ha na ankouein biken, ha me o kaout unan, unan hag a nevoa evel don eur galon ha ne glaske ive nemed ar peuc'h: hennez eo an hini a welan c'hoaz en devez a hirie, hennez eo da dad, Doue d'he barono.

O ma mab? eun devez benag, ha na deñio ked did ar c'hoant da staga da galon ouz unan all! Pedit a ran Doue da rei did evel ma lare da dad, eur plach fur ha zantel, evit beva en doujanz hag en grasou an Aotrou Doue. Evit an dud a wel ar baradoz, evel rekompanz d'ar vuez a boan man, eun dra hebken a zeu d'ho c'honzoli; ar zonzjer deuz Doue! »

An Itron Kerzenan, a laraz kement ze gand kement a vuez, ma skoënt en kalon Efflam Kerzenan evel kement a gleveou; ha pa c'heaz e vam kwit, en em lakaz da zonzjer er pezh a oa o paouez kleved; zevel a reaz evit digeri prenestr he gambr.

Pegen kaër a oa neuze maner Kerzenan hag ar vro a zisplege dirakan; ar c'hoajou, ar parkeier, rivier melin Sant Nikolaz, a weled ac'hané, sklerijennet gant an heol veure. Ar maner, na oa ken henvel ouz eur c'hastell koz, en dro d'he zorojou, ar roz gwen, ar fleur, a grape, ha dirakan eur jardin vraz, leun ha we avalou pe ber, karget oll a freuz, ha pelloc'h var bord ar zaon, ar prajeier glaz ië.

En tu klei d'ar maner, e weled eun donel, goloët a vrug koachet gand an troël, a grape a uz d'ei dre oll.

Eno en donel ze, eo a noa disket Efflam Kerzenan pedit ha karet Doue; eno var barlen e vam eo a noa disket bea eur bugel fur.

En tu all en mesk ar gwé, ar parkeier, e wele bourk vihan Tremel, gant e die gwen, ha pelloc'h kastell kaër an aotrou Keriell.

Kustummet da veva zerret en Pariz, mab an itron Kerzenan na oa ket evit kas he zaou lagad divar ar vro gaër

ze, ha goude bea dijuniel ec'h eaz e unan da vale, dre ar jardin hag ar parkeier, da bere c'houec'h vla araog a laraz kenavo an dour en e zaoulagad.

Bale a rédioustadik, pleget gantan e benn. Ar roz, ar fleur an delliou a c'hije gand an avel veure.

Bokejou ha fleur, na dal ket ar boan d'ec'h plega ho penn dirag ho mestr: na anave ken ac'hanoc'h! En dro d'ar maner, netra na neuz chanchet! nan, netra! nemed kalon ho mestr.

Arru kreizde, hag ar c'hloc'h a zonaz en Trémel, tom ha boc'h an amzer, Efflam Kerzenan ac'h eaz da c'hourvez en donel a meuz diskouezet d'ec'h, rag brevet a oa c'hoaz gand e veaj.

Pa zihunaz, an Aotrou Person hag e vam a glaske anean dre ar jardinou. Sevel a reaz, evit mont trezek enhé, an aotrou Person hen stardaz var he galon, rag gwell galz a blijadur a noa ouz hen gweled.

Efflam Kerzenan hag an aotrou Person a c'heaz neuze dindan an donel d'ober eur gozeaden; kozeal a rejont deuz Pariz ha deuz ar vuez a rener eno, n'oun ket penoz a zavaz kaoz an demei. « Breman a zonzjer, eme an aotrou Person, a c'hez da brepari demei! »

— « Ar pezh a zell an demei, eme Efflam, na gozeomp ket deuz ze. Na n'in ket a eneb d'ar pezh a meuz laret beteg vremen! »

— « Setu aze a lako nec'het braz da donton, mar geo gwir ar pezh a meuz klevet ».

— « Poan a ra ganin, mar keret, mez evelse eo, ha dond raio eun amzer ma renko an tadou prena ker ho mibien kaër! »

— « Ha zonzjer a rez bea malurusoc'h, ma pije da zikour ac'hanout eur plac'h vad, devot ha karantezuz? »

— « Na vefent ket, a respontaz Efflam Kerzenan, eur plac'h evel ma leret, mad, devot ha karantezuz, en amzer man, a zo gwall diez da gaout. »

— « Kemer a ran ar pezh a lerez evit gwir, eur plac'h evel ma lerez, a c'hell bea, koulz koude, en eur c'horn benag deuz Breiz-Izel. »

— « Lezet ac'hanon da laret d'ec'h penoz ar pezh a meuz gwelet beteg vremen, a zistro ac'hanon a grenn deuz an demei. Ma klevomp aliez ar merc'hed demet o wela, pegen aliez na glever ked ar gwazed en em glem da veza kaved en ho groage nemed traou pentel, ha dindan an traou pentel ze, netra. »

— « Kement den a zo, Efflam, a oar pegement a dal kalon ar plac'h, koulz hag ar gwaz a dremen he amzer o nem benta; ha tud ar bed a oar welloc'h c'hoaz eged ar belek penoz eo red, evit kaoud eur plac'h vad, hi c'hask en mesk ar re a laka Doue arog an oll draou all; ar relijion hebken eo a c'hall rei nerz awalc'h evit rezista da dentasionou ar bed. »

— « Setu aman ho relijion: ar pedennou a leront, var ar pemde, na n'int ked da gonta, red eo d'in mont beteg ar zul, devez an aotrou Doue, devez ar pedennou. Petra a ra neuze demezeled ar c'haëriou! D'ar zul ar beure e tihunont, var dro dek heur hanter pe eunek heur, rag an dansou, an ebatou, na bermettont ked d'hé mont abred da gousked; dihuni a reont, hag en eur frotta ho daou lagad, en em difouront gand kalz a boan er maëz: goude a c'heont da leina. krosmoli a reont a eneb d'ho domestiked, chikana a reont anhé, ha neuze pa vez leun o c'hof, ze ve deuz an nerz a chom ganthé goude bea danset ha frinket en pad an noz, ac'h eont var droad, pe en gwetur, evit kleved an oferen greizde. »

Gwelet a ret hu anhe o tont en iliz hanter gousket, goloët a berlez, hag a zantelez, ho spered labeet c'hoaz gand ar zonzjer deuz an traou o deve gwelet, en noz tremenet, mont a reont zonn ganthe ho fen, dre vesk an dud d'ar penn huella an iliz; eno c'hortoont, en eur dreï en dro ho manegou lër melen, ar belek a gle laret an ofern, hag a ve kalz re hir o nem wiska. »

Pa c'heont var bennou ho daoulin n'eo ked, evel gwech

all, var ar pave, maëz var eur gador vouret, voulouzet ru pe c'hlaç. Pa zavont ac'hane eo evit teuleur eur zell var an dud a vez en dro d'hè. En em asten a reont var ho c'hador kentoc'h, evit rei da c'houde o deveuz robennou, pe boutou ler ha na vent ket henvel dimeuz ar re all, ha me oar petra tout, ! Paket e vent, memez tra evel merc'hodennou.

N'on ket kab da laret deoc'h pegement a draou brao a vez ganthè : chapeledou aour, leveriou bihan, leun a limajou dantelezet.

Ar belek a zav deuz an aoter, digeri reont neuze ho levrik alaouret, evit teuleur eur zell var al limajou dantelezed, sevel a reont en ho zao, evit daoulina, ober a reont zin ar groaz, evit ober vel ar re all.

Ouz ho gwelet, eur paour kez den jaouank a gredfe awoallac'h e vent o pedi ; ho daou lagad a bar bepred var mouchouer, roben pe voutou ar re a vez en ho c'hichen.

— « Gwir eo ar pez a lerez, n'eo ket deuz ar merc'hed oll, mez deuz darn a weler er c'haëriou, hag unan bennag deuz hon bro. Relijion ar re-ze na n'eo ket diez da ziski : kemer peurz en kalz a oberou, mont d'an oferen bep sul, ma ne deuz ket a boan benn, dansal, neubeut a goraiz : hag er fin ober ho fask. »

— « Ia a respontaz neuze Eflam Kerzenan, pa zonzjer en kement-se, piou a larfe penoz n'a n'eo ket an demeï, evel ma lavar darn, an ifern var an douar ? ar gwaz a bill e vreg, ar plac'h pa ne zonzjer nemed en em benta, hi vez atao o varbillat ar vugale na blegont ken. Var al lerer na zeme ken nemed an dud a gonverz, al labourerien evit bea daou da chacha var an arar e-lec'h unan, eun notaër bennag hag a renk paça e garg ; na n'euz kap den da gompren ar vuez a ren etre daou zen staget gant chaden ar briadelez evit biken ! »

« Piou eta, eme an Aotrou Person, a neuz graët deuz ar gir-ze eur gir-all ? Piou a neuz graët, deuz eur gir ker koant, ar garantez, eur gir hag a lemm digant an den ar burete ? An dud o deuz kollet ho fe na welont er briadelez nemed plijadurezou ar bed-man. An dud na hadont nemed dreok, na vo ket red d'é sonjal kaout ed mad.

Ma n'em gavfe evel ma lerez, e c'halfe an Iliz mond da goach pell duze, evit rei plas d'ar plac'h-ze a meump gwelet adori var an aoteriou an ilizou. »

### III

D'ar zul var-lerc'h, an Itron Kerzenan ha Soazik a c'hè ho diou, galvet gant mouez ar c'hleier, tresek ar bouk, evit kleved an oferen veure ; eun tammik araog an oferen, an Itron Kerzenan a c'heaz d'ar sekretiri, el-lec'h ma kavaz an Aotrou Person o lenn e vreuriel.

— « Pardonet ac'hanon, emei, mar teuan da ambuzac'hanoç'h ! Glac'haret on, rag kalon ma mab a zo kollet... Petra a zonzjer diouthan ? N'ouzon ket petra da sonjal pa gomprennan ennan ! Ha dec'h da noz, pa oamp o koania, e nije kazi evel mez pa zellen outhan ; gweled a ran penoz Eflam na vez ket aëzet dirakon !... Kaer a me bea zeder, kozcal brao dioutan, ma mab a vez bepred vel pa ne vefe ket er gaër !!! »

— « Itron, eme an Aotrou Person, ho mab na n'eo ken evel gwech-all, eur bugel, mez eun den ! Mar neuz digoret he spered d'an diskamanchou braz, an diskamant-ze a c'hall bea mouget, eun tamm bennag, ar feiz ken stard en he galon pa c'heaz da Bariz !

N'et ket evit-ze da goll fianz en Doue ; na zilezo ket ac'hanoç'h ; ho mab a deuo adare evel diagent ; da c'hortoz, Itron, pedet an Aotrou-Doue. Ha diwallit ispisial rag digas da zonzjer d'ean deuz kement-se ! Ar pez a meuz da laret d'eoc'h eo : beza bepred dous ha mad en e andret, bet zur, penoz Doue a roio d'eoc'h ar c'hras-ze, ha gant an esperanz a vefomp silaouet e savin breamazon deuz an aoter. »

En pad an oferen, an Itron Kerzenan na reaz nemed hirvoudi ; pedi a re Doue da zond d'hi zikour, gant fianz ar gristenien genta.

Achu an oferen, Soazik a renkaz chom da c'hortoz anei er porched, azea rez en toull an nor var eur bank vein... selled a re ouz ar Sent koz ; « Ar re-ze o deuz bet muioc'h a boan evidomp-ni c'hoaz, araog mond d'ar baradoz, a lare Soazik d'ei e-unan. » Sant-Per gant e alc'houeou, ha Sant-Paol gant e gleve noaz, a ziskweze d'ei sklaër penoz n'er ket er baradoz evel ma antreer en eun hosteleri bennag !

En pad an amzer-ze, an Itron Kerzenan, an dour n'he daoulagad a bede bepred. Petra a c'houlenne evelse ? Goulenn a re digant Doue ma na deuje ket he mab da vea henvel ouz ar re-ze a weler en kement hosteleri, en kement toull fall eo posubl kaout, ma na deuje ket da veza henvel ouz an dud diskiant-ze, a weler o c'hoarzin var gement tra vad ha zantel zo, ouz ar re-ze a vez bepred oc'h essa labea, gant o c'hojou hudur, en kalon an den fur, ar santimanchou ar c'haëra. Ar paour kez intanvez a c'houlenne c'hoaz ma teufe Doue d'ober deuz he mab eur bugel karantezuz, ha mad en kever an oll, evel diagent.

Er c'heit-ze Soazik, o klask goud hano unan deuz Sent koz ar porc'hed, a gave gwall hir an amzer.

An Itron Kerzenan a deue neuze er maëz deuz an iliz ; he daoulagad ruiet gant an daërou, a ziskweze awalc'h pegen braz a oa e displijadur.

(Da heuil.)

## Ar Gador-Brezeg

### VAR AR BED ALL HAG AN ANAON

(Kendalc'h)

Absalon, resolvet da vervel kent evit beza dispartiet euz e dad, a elle mond d'e weled en despet d'e urzou hag e riskl deuz e vuhez. N'en divize bet med ar maro evid en em daol d'e dreid ha goulenn digantan e c'hras : esper en devoa zoken e vize deut e zaërou hag e c'hlac'har da bikat kalon e dad karantezus ha da obten digant e vadelez ar pardon euz e fot. Mez eneou ar Purkator ne dint evit ober netra anezo o-hunan ; ne dint ket lipr da choaz ar maro pe ar brivasion euz o Doue. Seul vui m'en em eforsonet da sevel var zu an nenv, seul vui e santont an dorn ingwelapl euz a Zone oc'h o fellaal. Seul dommoc'h eo o c'hoant d'en em unani gant o C'hrouer, seul vuioç'h e teuont da santout ar brazder euz o dle !

En em weled dispartiet euz eun Doue pehini hepken a c'hell renta eun ene eürus, beza dispartiet euz a gompagnonez an Eled hag ar Sent, pehini a zo agreaploc'h evid kement tra a c'hellfer sonjal, gouzant poaniou diremed, kaout hir an amzer merket gant Doue evid beza digemeret er baradoz, pebez anken, pebez hirnez, pebez tourmant, pebez glac'har ! Ha n'en deo ket trawalc'h kement-ma hepken da douch ho kalon. Meritout ho truez, ha kreski ho tevotion e kenver an Anaon ? Mez e ken kaz n'en defe ket a c'halloud awalc'h var o spered ar pez em heuz lavaret bete vrema euz a boaniou ar purkator, marteze komz deuz ho tleadou en o andret a roio d'eoc'h gweled ho tizanaoudegez, antren ennoç'h hoc'h-unan, ha kaout mui a garantez evid an dud, ar gerent hag ar vignoned hoc'h euz diouret.

### Eil poent

Dever eo d'eomp ober hor posubl evid soulaji eneou ar purkator en o foaniou diremed, hag ispisial pedi evito. Da genta, Doue hen ordren d'eomp, d'an eil, ar garantez a dleomp da gaout an eil evid egile a c'houlen diganeomp dond d'o soulaji ; d'an dride ive, al lealded hag an anaoudegez-vad a dle hon dougen da sikour hon madoberourien ; er fin, hon interest, hon frofit, a zeu d'en em unani gant ar rezoniou all evid hon lakaat da bedi evid an anaon tremenet.

Tenna eun ene euz ar Burkator a zo enori Doue hag an Iliz er gwella feson. Glorifia a rer Doue an Tad, evel ma zeo bet glorifiet gant e Vab, pehini raktal goude e varo, a barz zoken pignat en nenvou, a ziskennaz el limbou, da lavaret eo el lec'h a repoze ennan eneou an dud varo en gras Doue, abaoe krouidigez ar bed, evid o frealzi, hag o diliüra. Gallout a reomp heuil skuere hon Salver en eur serten doare, gallout a reomp disken dre spered el limbou, er burkator, evid dousaat dre hor pedennou, hon oberou-mad, poaniou eneou pur, santel ha vertuzuz ha na c'hortozont mui evit sortial ac'hane, kaout o frankiz, pignat en nenvou, ha kana meulodi an Aotrou, ne.

med eun neuboudik pedennou, aluzennou, ha piniñ euz hor perz.

Mar implijomp mad hor galloud, mar sav bete tron Doue mouez hon oberou-mad evid goulenn renoz ha gloar an eneou tremenet, e forsomp Doue d'hor silaou, rag var eun dro e kreskomp e c'hloar e-hunan, oc'h avans ar gloar euz a eneou ar purkator.

N'ankounac'hait ket ive penoz evel kristenien e renkot karout o nesa evel doc'h oc'h unan. Da lavaret eo, sonjit eo red d'eoc'h c'hoantaat ha digas d'o nesa, hervez ho kalloud, an hevelep mad evel ma karfec'h d'eoc'h hoc'h-unan. Mankout a rafec'h d'ar garantez gristen oc'h e lezel, dre ho fot, en eur hoan bennag er bed-ma, mez pegemend brasoc'h n'eo ket ho tizanaouedegez mar dilezit e poaniou ker braz hag eo re ar purkator, ho kerent, ho mignoned, ho tud-koz, ho pùgale, pere ne dint dalc'het eno. nemed marteze dre m'o deuz bet re a garantez evidoc'h, nemed marteze dre ma oant re douget evit ho plijadur, hoc'h ezamantehou, o madou.

Penoz, bugale mondian, na refet nemed saillat, dansal, tri-pal, keit ema ho tad, ho mam, ho preur, o tevi e kreiz flam-mou kriz ar purkator ? Penoz tud lubrik ha diroll, dispign a reot evid en em s'ha ha bragal, evit tenna varnoc'h an daoulagad mil milliget euz a objed ho tizurzou, an danvez en doa lezet ho tad, ho mam, ho kerent d'oc'h, hag o ankounac'hait a ret e-kreiz o foaniou terrupl ?

Penoz, mevierien ha mevierized, peulioù an tavarnioù, na ziuverfet ket an arc'hant a zispignit en hostalerioù, oc'h eva hag o lonka, hag e kredfet beza revinet mar fouelit eur gwennek bennag evid soulaji an anaon ?

Ha c'houi, tud diegus, c'houi pere a gar kemend ho madou, hoc'h ezamant, sonjit penoz ho foaniou kaër, a zo marteze ar penn-kaoz ma zeo dalc'het er purkator an tad en deuz bet kemend labouret, kemend c'houezet, ken aliez beillet, gouzanvet ar rigor euz an amzer evid prokuli d'eoc'h eur vuhez dizourzi ! Ha, tud dinatur, ha posubl a ve d'eoc'h dilezel neb en deuz ho karet ?

Kredi a rafec'h beza kablus braz mar chomfec'h heb renti an enorioù diveza da gorrour maro pere na anduront poan a-bed. Soursi kaër, en gwirionez ! Mez soursi didalvez koulz-koude, e kichen ar soursi deuz an ene ankeniet ! Rag kristenien, pesort profit a c'hell tenna eur c'horf maro euz an enorioù a renter d'ezan, euz ar cher-vad a rer en tavarnioù en digarez e interamant, deuz e anuel, e zervichou ? Netra 'grena ! « An enorioù-ze, eme St-Augustin, a zo bet savet evid frealzidigez ar re veo, ha nan evid soulaj ar re varo. » *Solutio vivorum, non subsidio mortuorum.* Mez mar 'doc'h isansupl da gement-ma, sonjit en dever striz e pehini e moc'h da ober justis e kenver o nesa. "N'en deuz pardon e-bed, eme St-Augustin, evid piou bennag na rent ket d'e nesa ar pez a aparchant outan."

—o—

Erfin, an diveza moien ha marteze ar barreka da ober d'eoc'h sonjal en eneou enkrezet, eo sonjal en hoc'h interest hoc'h-unan. Ia, kristenien, hoc'h avantach eo pedi evid ar re varo. Muioch a c'hounid e tennfet euz ar pedennou a lakfet lavaret evito evid na raio eneou ar purkator zoken a-wechou. Ha setu ama ar rezon. An eneou a zo er purkator a zo holl eneou santel. Asur int euz o silvidigez. N'o deuz nemed eun amzer da dremenn en tourmant, goude e pingnint en nenvou da diaoui Doue. Mez ni pec'herien, pebez stad eo hon hini ? Pebez asuranz hon euz-ni euz hor silvidigez ? Hon interest a zo eta kaout eur gwardour galloudus bennag e kichen Doue, hag ar gwir voien evid e gaout eo pedi evid an anaon. Mar 'domp eürus awalch evit tenna a hoan eun ene bennag, e kavimp hep more'hed eun difennour dirag an Holl-C'halloudek. Hag er c'hontrol, kristenien, mar ankounac'homp eneou ar purkator, Doue a bermeto ma vezimp ankounac'heet. Barn a reio ahanomp gant ar muzul hon bezo barnet ar re all gantan. Rentet a vezo d'eomp kaleder evid kaleder, ankoua evid ankoua.

*Surgite ergo in adiutorium illis,* eme Sant-Bernard. Savit hirio ho mouezioù evid an eneou tremenet ! Na refet komunion e-bed evid o diliüranz, na lavarfet peden a-bed evito, na refet aluzen a-bed en o hano, a gemend na brokulo d'ezo eur soulaj braz, mar partiont euz eun galon glan ha santel.

Ha c'houi ive neuze e vezo pedet evidoc'h goude ho maro, hag ho pezo an eurvad da veuli Doue e-pad ar beurladelez gant an eneou eürus euz a bere ho pezo hastet ar frankiz, ar pez a zouetan d'eoc'h, evelse-bezet-great.

*Prezegen bet lavaret gant eur person diouz Leon evid Gouel an Anaon er bloavez 1789.*



## SONJ AR GEAR

An darvoud neuz ma c'haset pell deuz va Breiz-Izel,  
Enn eur c'horn a Vro-C'hall, hanvet an Normandi  
Abaoue tri bloaz zo em oun enn dilezel  
Deuz ar pez a gavenn gwechal ebarz em zi.

Bemdez pa zav an heol, 'vit koumanz he veaj,  
Deuz ar beure d'ann noz, a-dreuz d'ann envou glaz  
Siouaz ne velann mui vel em bugaleaj,  
Ann draonien o lintra gand he sklerijenn vraz.

Ar venojennik striz, kollet dindan ar gwez,  
A gaz deuz ti va zad etrezek ar ster veur,  
Na wel mui ac'hanon o vale dienkreiz  
E giz em iaouankiz, asamblez gand va breur.

Ar oazik kammigellet a red e kreiz ar ster  
Bevennet gand ieot hir ha gand haleg huel,  
Va skeud ne velo mui ebarz enn he dour skler  
Vel pa jommen gwechall var he riblou ken pell.

Hag an eostik kuzet etouez ar brankou gwez  
A gane d'ann hekleo he zoniou ken lirzin  
N'anveo mui, siouaz, pa zeui he vignoun kez  
D'he chilaou, eur vech all er ster deuz ar mintin.

Nag ar fede memez a zav euz ar mene  
'Vit pignet enn oabl glaz, n'eur gana ken laouen,  
N'halla mui evidon, pedi 'n aotrou Doue,  
Rag, paour kez divroad, glevinn mui he beden.

Pa gano va dousik, o tiouall he loened,  
Er parkou, er prajou, gwerzioù hon zadou koz,  
Ne c'hellin mui kemer ar post enn do losket  
A ratoz evidon, var ann tu all d'ar roz.

Da bardon va farrez, n'halla mui mont zoken  
Asamblez gand va zud ha va mignoned ker...  
Me garie koulz-koude chacha var ar gorden,  
Ha chilaou ar barz koz, gwechall pa oan er ger.

Pad ann nozvechou goan, goude ve debret koan  
Bodet enn-dro d'an tan, var eur skabellik koat,  
O chilaou konchennou, n'em bije morse doan  
Hag ar c'housked morse zerre ma daoulagad.

Erfin, enn iliz parrez, da zul, d'an oferenn,  
Gand eur feiz birvidik, me a garie kana,  
Var beziou va anaoun me lare va feden,  
Siouaz, n'er c'hellin mui ; re bell ez oun brema.

Kenvroiz, selaouit eur paour kez divroad,  
Zo dalc'het e pell-bro abaoe keit amzer  
Chomit barz enn Arvor, aze a vevoc'h mad :  
Er mez anei, Breiziz, gavoc'h nemed mizer.

POTR AR C'HAP.

## IEZ AR C'HELTED

*D'am mignon ker EVNIK ARVOR*

Iez a gane gwechall en goueled al lannou  
Pe dirag ar mor don Ossian ha Marzin !  
Iez a gan hirio c'hoaz, evuruz ha lirzin  
Gwynu Ioan, ha Taldir en ho c'hanaouennou !

Setu neuz c'hoant ar Gall d'az mouga en hon Breiz !!  
Hogen, ar paour kacz zod ! kaer neuz beza nerzuz  
Na deui ket a-benn euz he dorfet heuzuz.  
Kalonou dir ha ter a lam atao 'n hon c'hreiz !

Ha n'eo ket evit man ! Prest omp hiviziken  
Da skuill hon gwad beteg an diveza taken  
Evidout mar d'eo red, o iez koz ! o iez kaër !..

Gellout 'rez 'ta beza dinec'h ha dianken  
Rag en desp't da ico miliget ar gwasker  
Enoret en hon touez, te vevo da viken !!!..

Raozon

MATHALIZ

# HUANADOU

*D'am mignoun ker Yeunic X... mousik bihan var eul lestr  
eat d'ober ar besketerez da vro an Douar-Nevez.*

Var askel eur goulmik  
Euz va bro Breiz-Izel  
Duont betek da lestrik  
Ma a garfe nijel.

:Siouaz din ! Ne c'hellan  
Heuilla di va spered.  
Choum a ran va unan  
Er bed koulz lavaret.

N'out ket evit kompren  
Yeunic ar boan spered  
A wask stard va empen  
Gant e meudou kaled.

Va c'halon zo treuzet  
Gant kleze ar c'hlaç'har,  
Va daoulagad beuzet,  
A zaelou zo leun-bar.

Kollet va holl joaïou,  
Nizet peb levez,  
Ne jom var va skoachou  
Nemet eur zam enkreuz.

Yeunic peger laouen,  
Vedo hor c'halonou  
P'edomp var ar flouren,  
P'er c'hoad o klask neizou.

Morse vijemp gwelet  
An eil heb egile.  
Vel na vije nemet  
Etrezomp eun ene.

N'oun ket vit dizonjal  
An amzer dremenet  
Oh ! na me a meuz mal  
Adarre d'ez kuele !

Hogen eüruz vezin  
P'en em gavi er vro,  
Oh ! na me vo lirin,  
An deiz ma vi dizro !

Aon am euz koulskoude...  
Euz ar mor reuzeudik  
Skrijal ran va Doue,  
Pa zonzan eun tammik...

Penoz, c'helfez beza  
Gant da lestrik lounket,  
E iafez da veva  
E mor doun ar pesked.

Pa zigwez ar zonz-ze,  
Da vantri va c'halon,  
Seblantout ra neuze  
D'in koll tre va rezon.

Vel eun ene stlapet  
Ouz an nenv, var an douar  
Paour kez, vezan gwelet,  
Spountet ha dilavar

O vont tresek an aod  
Var an dachen bella,  
Ha staga var ar iaod,  
Va unan da ouela.

E harz va zreid, ar mor,  
A gleo va c'hlemmaden.  
Da Vestr braz an Arvor,  
Me lavar eur beden.

« Er broiou estranjour,  
Va c'hamalad gwella  
Noz deiz, zo var an dour,  
Bemdez o pesketa.

Goagou bian ar mor-doun,  
D'e vag pa reoc'h lazig  
Lavarit d'am mignoun,  
Kuzuliou goustadig.

Penaoz e gamalad  
Bemdez a zonz ennan,  
E vrasa kalonad,  
Eo beza pell outhan.

Goagou kriz ha treitour  
Pa vezoc'h dirollet  
Bagig ar pesketour  
Aliez ve kollet.

Kemerit en truez  
Eur mousik bian dister,  
Espernit e vuez,  
Pa vezo-en danger.

Korriked Breiz-Izel  
Am zelaou, livirit :  
C'houi rei d'ezan skoazel,..  
Ha va c'hlevet a rit ? »

Neuze, petra glevan,  
Eur vouezik ken seder,  
Savet euz ar mor glan,  
A gomz d'in gant douster.

Komz a ra goustadig  
Hag ar pez a lavar  
Zigas em c'halonik,  
Ar pare d'am glac'har.

« Korriked Breiz-Iel,  
Zelaou hoc'h hirvoudou  
C'houi zo mignoun fidel  
Sec'hit ta o taëlou.

Kerz a remp dizale,  
Betek ho kamalad ;  
Bezit sur e vue,  
Vezo diwallet mad.

Dinec'h hellit beza  
Bepred en e genver,  
Ni vo tostik deza  
D'e viret en danger.

Arog ar bloaz nevez,  
A dra zur e vezo,  
Fin d'ar besketerez  
Hen, beo ha iac'h dizro ».

*Ar Faou.*

AR BRUGER.

Eur vouez rust ec'h eo marteze,  
Hogen n'euz forz a-bed da ze !  
Ma zud, em raok, er memez stum,  
O deuz komzet a rum da rum,  
Ar Brezonek evidon-me  
A zo ken santel hag an ne,  
Abalamour da ze lakin  
Ma holl galloud ha ma ijin  
D'hen delc'hen en bué bepred  
En mesk gouenn tud ar Vretoned.  
Kalz a zo o heuil memez hent,  
Re all a zeui c'hoaz, a oa kent  
Dizoursi deuz ar pez a zell  
Ouz iez Gorenez Breiz-Izel...

—o—

Rag mar 'neuz c'houezet an deiz all  
War Vreiz-Izel eun avel fall  
Dichadenmet deuz tachennoù Bro C'hall,  
Diwar gribennou stenn ar C'hragou hag Arrez  
Eun all an neuz iudet eneb d'ezan gant prez.  
Eun emgann etrezê nevez-zo zo savet  
N'ê ket lâret ve mestr avel ar C'hallaoued.  
Meur a Vreizad chomet beteg-henn didalve  
A zav e chouk pa glev tremenn an avel-ze.  
Stronsal ra en e greiz e galon baour lawen.  
Hag eur harlink a joa red e gorf penn da benn.

—o—

Seul vui ma vo Breiz gwall gaset  
Seul vui vo gwelloc'h sikouret,  
Ha meur a iez, me a zo zur,  
Da vro an Ankoua a vo et  
Arok ma vezo dilezet  
Hini mibien-bihan Arzur.

KAREDIK AR C'HOZIK

## AL LANN

*Kinniget da VICHÉL EVEN. An ton savet gant J.-M. RANNOU*

Bet eo meulet an dero glaz,  
An avalen hag ar fao braz,  
An dillen goz e pen an ti,  
Ar gistinen he froez gant-hi,  
Ar spernen wenn, an ivinen,  
Ar bruk ruz, ar banel melen ;  
— Nag al Lann perlezen ar vro.  
Piou hen meulo ?

Al lann zo devot ha zantel ;  
El lann e hirvoud an avel  
Vel eur beden pe eur c'hlemvan  
Perag, kristen, na rit-hu van  
Pa bik ho torn euz hen dispen ?  
— Digas a ra zonz euz ar Penn  
Bet kurunet gant spern noazuz  
Euz penn Jezuz.

M'an bije-me telen Marzin  
Me a ganje war ma daoulin  
En enor d'ar blantennik aour,  
Tra ar pinvidik ha tra ar paour,  
En enor da lann Breiz-Izel,  
Nag euz tomm nag euz ien na zell  
Hag a dol bleun e pep mare  
Pep tu d'Are.

Aboue zo gerreg lez ar mor  
A zo lann war douar Arvor,  
Pa ziskennaz hon ebessel  
Euz a Vreiz-Veur e Breiz-Izel,  
Kaer oa gwelet tostik d'an od  
Eun oter zavet war ar ieod  
Ha lann melen da vokejou  
Tro d'hon Aotrou.

Al lann zo mignoun d'ar Breizad ;  
Pa zêv ar reo glazur ar prad,  
Lann e ve krennet ha blonsel,  
Gant han ve maget ar ronsed,  
Gant lann e ve goret ar forn.  
Hag e kreiz ar goany, pa ra skorn,  
An tiegez en-dro d'an tan  
A domm gant lann.

Dre 'r menciou, er c'hoajou don,  
E vije klevet o liston  
Mouez Tual, Gwellas hag Herve,  
Labourerien ar park nevez ;  
Mez dre ma stennent an ero,  
Da viret an had tro war dro,  
Lann a zave, lann plomm ha stard  
Vel eur soudard.

Bet oc'h da oël-lan war ar roz ?  
Nag a dantad e kreiz an noz !...  
Lann berniet ken uhel ha tour  
A zoug da Sant Ian-Vadezour  
Ken liez a flamijen gaer  
Vel a stereden zo en aer ;  
Koantiz hon gerjer o pedi...  
Pebez dudi !

Here ar Sent a ziwanaç,  
Pell-amzer hon bro hen medaz.  
Mez setu deut amprevaned  
Ha preved en ifern ganet  
Hag a skuill ho binim flieruz  
War irvi hon Sent gloriuz !...  
Mirit c'hoaz ed an Aviel,  
Lann Breiz-Izel !

*Plouguernevel.*

LOIZ PORZ-IZEL.

## I A M E G A N O

Hag en iez ar Breizad a vo !  
Na pa ve gant an holl kâzet,  
Ganin bepred na vezo ket,  
Me zo bugel ar Menezioù,  
Bugel ar Parkou, ar C'hoajou ;  
Ma iez a vezo mouez an dour,  
Mouez ar c'hleier en bek an tour,  
Mouez an avel-gorn pa iuda  
Ha mouez ar gurun pa straka.

## Dihunamb !

*D'is, Barh Labourer !*

Hiniù duchentil a Vro-Gall  
E hoarh doh hun guskemanteu  
Hag, allas ! mar a Vreihad dall  
E goll ar pen get ou cheleu  
Hag e daul " chupen " e dadeu.

En Ankeu, digor e askel  
E glah en tu de skoein arnamb,  
Ma er gizieu kouh e verüel :  
Dihunamb, pautred, dihunamb !

Hiniù duchentil a Vro-Gall  
Hun flastr get ou lezenneu kri,  
Guerhet ou haloneu d'er Fall  
Ind e gaz en treu kaer memb-ni,  
Hag eneb d'he ne saù hannni.

En Ankeu, digor e askel  
E glah en tu de skoein arnamb,  
Ma er frankizieu e verüel :  
Dihunamb, pautred, dihunamb !

Hiniù duchentil a Vro-Gall  
Get ur horvad arfleu e lar :  
« Konzet galleg el er re 'rall ! »  
Ha kavouit e rer ar hun doar  
Tud ag e zilausk ou lavar.

En Ankeu, digor e askel,  
E glah en tu de skoein arnamb,  
Ma iez hun tadeu e verüel :  
Dihunamb, pautred, dihunamb !

Hiniù duchentil a Vro-Gall  
En ou hevelenneu e skriü :  
« N'en des na Doue, na bed arall ! »  
Ha lod, doh ou hleuet, e viü  
Hemb pedein Doue, el loned gouü !

En Ankeu, digor e askel  
E glah en tu de skoein arnamb  
Ma er Fe kristen e veruel :  
Dihunamb, pautred, dihunamb !

Hiniù, duchentil a Vro-Gall  
E venn goaskein oll en treu-se  
Agoust m'ou des groeit gueharall,  
Inour Breih, hag he nerh eue :  
Ha ni e bleg penn dirag he...

En Ankeu, digor e askel,  
E glah en tu de skoein arnamb,  
« *Ma hun Mam-Vroig e verüel :*  
*Dihunamb, pautred, dihunamb !*

BLEIMOR.

# JELVESTRIK

## Ar Chouan Bihan

TRAJEDIEN EN PEVAR ARVEST

Gant an ARC'HANTEK

*(Kendalc'h)*

HERVE SAZI

Ober a ri an eil ken koulz hag egile  
Pa peuz kement a c'hoant.

GUILLOU

Piou zo erru aze ?

**Kevren III**

HERVE, GUILLOU, eur CHOUAN

A hanta louen gez, pelec'h eo partiet  
Potred ar Republik, pe sort koste int et ?

AR CHOUAN

Et int da Lesneven, ha hast a zo gante  
Da vont deuz ar c'hontre lec'h n'eo ket gwell vraz d'ê ;  
Mez eun nebeudik tud, a dreuz al lanneier  
A heuil ar C'hallaoued pad eur pennad amzer  
'Vit diskar eun toullad deuz ar c'hoz diaoulou glaz  
Spenn unan dioutê chomo war an hent braz.

HERVE SAZI

Et int da gerc'hat tud vit stouva an toullou  
Neuz gret ar Chouanted ebarz o renkadoù,  
Heb dale marteze a teufont var o c'hiz  
Pa voint dek deuz unan.

GUILLOU

Red a vo zellet piz

War hent braz Lesneven hag hini Montroulez.  
Hag ive war an hent a ia da Geraez.

HERVE SAZI

Gwir a lavarez, Guilou, kers ta, ha kers buan  
Ha lak tud da ziwal an hentchou teu aman,  
Me ia gant ma zudou da guzed don er c'hoat  
Vit a c'helfont diskuiz pa d'eo bet leinet mad.

**Kevren IV**

YANN KLEGAN an tad

Koll a ran esperanz, glevin biken netra  
Deuz ar pezh a glasken a n'ouzon ket para  
A lar d'in em c'halon, an draze a zo skler,  
Penez eo ar re c'hlaz a deuz gret an affer,  
Kaer a meuz bet goulenn digant peb unanik  
Hini a bed, siwaz, a neuz bet klevet grik  
Deuz an torfetourien, tanerien miliget,  
Pe ma deuz bet klevet na gredant ket laret  
Rag breman an holl dud a gren evel deliou  
Pa ve an avel grenv o c'houeza er bojou.  
Marteze ma mab Loeiz a c'hall bea klevet  
Eun tam kelou benak war sujet an torfet  
Ma neuz klevet kelou a glevin heb dale  
Ha mar deo ar re C'hlaz, pa deuio ar mare  
A c'hefomp kuit hon daou tresek ar Chouanted  
'Vit stourm deuz ar C'hlazed evel a zo dleet.

**Kevren V**

Ar mab LOEIZ. AN TAD

Para zo c'hoaz ma zad ? drouk livet eo o tremm  
Para zo eta c'hoaz pa ho klevan o klemm ?

AN TAD

Para zo ma mab kaez !

AR MAB

Laret d'in ar c'helou

A lak 'n ho taoulagad kement-se a zaelou.

AN TAD

Penn kaoz deuz ma daelou eo ar brasa arvar  
A lak barz ma c'halon eur jagrin zo dispar.  
Bemde hag en peb heur, atao ven o sonjal  
Piou a neuz gret an taol, piou eo ar c'hriminal  
A neuz laket an tan.

AR MAB

Piou med ar zoudarded !

AN TAD

A zur out ma mab kaez na n'om faziez ket ?  
Marteze eo re all !

AR MAB

N'eo ket, klevet a meuz.

Gand Pipi ar Mene oa drek eur vojen veuz  
O c'hedal ar re c'hlaz pa oant et barz an ti  
Evid mond da laerez, veld a ra pepini

Deuz ar friou ru-ze, leun holl a win ardant,  
Mez vel na oa netra en aour nag en arc'hant  
O deuz laket an tan evit bea venjet  
Deuz eun dro ken goullou o devoa du-man gret.

AN TAD

Loeiz, lavar d'in me c'hoaz, na peuz kleved netra  
Deuz Jelvestrik, da iontr, da voereb Franseza ?

AR MAB

Ma iontr ha ma moereb a zo et d'an nenvou  
Dre zorn ar meumeuz re.

AN TAD

Oiaou, pebeuz kelou !

A da vreur Jelvestrik ha hen zo en bue ?  
Lavar d'in ta ma mab.

AR MAB

Ia, ia, dre c'hras Doue !

AN TAD

Rentomp gras da Zoue 'vit bea diwallet  
Deuz eur maro ken kri, va mab muia karet.  
Na peuz ket laret d'in pe lec'h ma Jelvestrik ?  
Marteze ta eo et...

AR MAB

Deuz ze, den na oar grik.

Den a bed deuz war dro n'euz gallet laret d'in,  
Mez eun dra a sonjan lak ma c'halon lirzin:  
Me zo zur, ar potr kaez zo bet et bep dale  
Da gaout ar vignoned, en koste ar Fouille.

AN TAD

Ni ive ma fotr kaez a renko mont en dro  
Chom gant tud evelenn, gwelloc'h ve ar maro !  
Te Loeiz zo eur potr fin, te a glasko an tu  
Evit chach war hon zreit, ar gwella ve dustu,  
Na gav ket d'id ma mab ?

AR MAB

Gwelloc'h eo gortoz c'hoaz,

Gortoz eun devez mad, eun devez vo dinoaz.  
Bea prederiuz eo dever eun den fur  
Pa na sonjer ket mad a ve displijadur,  
Mez an taol a ve gret, re divezat a ve  
Da c'hadober an dra, n'haller ket dont a dre.  
Penez mont kuit hirie ? Na zonjet ket, tad kaez  
Zo soudarded partout en dro da Voutroulez;  
Araog vefomp erru gant tud vad Breiz-Izel  
A vefomp er prizon evit gortoz mervel.  
Ar Republikaned zo kaled ho c'halon  
Pardon na refont ket da zaou zoudard pardon,  
Rag evit an dud ze a vefomp traitourien  
Mad da vea sribill deuz pennik eur gorden.

AN TAD

Na meuz ket c'hoaz a c'hoant da vea krouget berr  
Tre an nenv an douar vel a ve gret d'al laer.  
Gortoomp eun tammik vel a lerez, ma mab,  
A pa teuo an heur a refomp an diskra.  
Koulskoude, Loeizik kaez, a gav d'in vo diez  
Mont betek ar Vreiziz deuz a gaer Montroulez  
Rag anvezet a vemp...

AR MAB

Dre ar guiskamanchou ?

Ni lezo an dillad en ti Yann ar C'hoadou,  
Henez zo eun den zo mignon d'ar Chouanted  
A raio skoazel demp evel a zo dleet  
Evit mont pell deuz kear tresek tud ar Roue,  
Soudarded Breiz-Izel feal er peb mare.

AN TAD

Pa vemp erru gante a glefomp marteze  
Kelou deuz Jelvestrik...

AR MAB

Brao vefe an dra-ze !

Mez vit na gresko ket 'n hon c'halon ar glac'h ar  
Na asuomp netra, chomomp atao var var :  
Rag ma lakomp n'hon fenn kaout Jelvestrik eno  
A mar n'her gavomp ket, an anken vo c'hoero.

AN TAD

Lavar d'in, mab hena, pegouls a c'hefomp kuit  
Benn ped devez aman ?

AR MAB

Holla ta, silaouit.

Eun benak zo o tont, klevout a ran an drouz,  
Trouz eur c'hoz boutou koat.

AN TAD

Ha piou eo ar marmouz

Teu da freza hon c'haoz ha da..

**Kevren VII**

YANN GOZ, AN TAD, AR MAB

AN TAD

Goasa amzer !

C'houi n'hini eo, Yann goz !

YANN GOZ

Ia me, Yann Miliner.

AR MAB, (e-unan)

An Trubard miliget !

YANN GOZ

Para larez ta, mab

Bouar oun eun tamik, na glevan ket gwell vad.

AR MAB

Larout ran peut kalon vit dont da Voutroulez  
Gand eun amzer ken fall.

YANN GOZ

Te zo leun a furnez,

Red a oa d'in dond aman, zilaouit larin d'ec'h.

*Sellat a ra en dro d'ean.*

AN TAD

Komzed, Yann miliner, komzed, bezit dinec'h,  
N'euz den a-bed war dro med tud eon ha leal  
A glask ar vad bepred en despet d'ar re fall.

YANN GOZ

Deut oun da Voutroulez da ziskleria penoz  
E man ar Chouanted kuzet deuz ho kortoz  
Ebarz koat ar Roue, a barz koat an Helaz  
Eno int n'em vodet e kreiz ar c'heuneud braz.  
Red mad eo dond a benn deuz ar ganfardet gwenn,  
Potred ar gizioz koz renk chom war an dachen.  
Neuze vo librente en hon bro en peb lec'h  
Pa vo ken na Roue na Doue na menec'h.  
An dud ze a labour atao war an tu-gin  
M'aint breman klask lakat Loeiz bihan an Dauphin  
Da roue war ar Franz. An dra ze na vo ket  
Rag benn eur pennadik, vo ken a Chouanted.

AN TAD

Ben eur pennad aman a refomp eur bale  
Koste koat an Helaz ha koat braz ar Roue  
Neuze a zilochfomp Chouanted Breiz-Izel  
Betek an divea a vo red d'e mervel.

YANN GOZ

Ia, ia ! mervel a reint betek an divea  
Neuze a vo arc'hant ha peuc' evit beva.

## AR MAB

Ar Republik, Yann Goz, a zo eur vamm dispar  
 Madelezuz atao vit an hini he c'har,  
 Ni, evit brezella zo bevet ha gwisket  
 Vel a vije gwechall an holl duchentiled ;  
 Mez bea zo tud all a dle zur gonit gwell  
 'Vit mesa Chouanted, 'vit mesa Breiz-Izel ;  
 Gwir eo, red eo lared, a riskont ho bue,  
 Bemde hag en peb heur a grenan evité.

## YANN GOZ

Nan, ma fotr, n'eo ket brao ober eur sort micher  
 En noz. en de, atao ar vue a risker ;  
 Vel a lerez, ma fotr, ar Republik zo mad  
 A ro eun tammik gafa, mez re neubeud afad.

(Da heull.)

## Pardon ar Bleun-Lann

### EN PONT-AVEN

Ar sul 6 a viz Eost, e oa pardon ar Bleun-Lann er gearik koant a Bont-Aven. O pebez pardon dudius eo bet hennez ! Enor ha trugarez da Dorik Botrel da veza aozet anezan da c'hloar hor Breiz, ha da veza great peb tra en eun doare *ken breizad*. Ia, netra na vanke, hag en gwirionez, mar zo bet gwir da damall meur a dra da Votrel er pean kenta ma komansaz skriva, brema (ma kar kendelc'hen en hent eo 'n em lakeet,) an holl a lavaro bennoz d'ezan.

En Pont-Aven, deuz ar mintin, zo bet kanet an oferen-bred, leun kouch an iliz a Vretoned hag ar Vretonezed. An Ao. Person an neuz great eur brezegen gaër en brezonek.

Dustu goude, Rouanez ar Bleun-Lann, koanta plac'hik ! hag he feder Brinsez a enor, koanta bleuniou ! holl gwisket giz o bro, a zo bet pourmenet dre gear en eur c'har braz fleuriet a vokejou lann, balan ha bruk, ha chechet gant pevar penn-ohen braz. Ouspenn dek mil a dud a oa o sellet hag a iouc'he a bouez o fenn : Bevet ar Rouanez ! Bevet Breiz !

Neuze zo bet c'hoaz kenzonek biniou, kenhenveladek gwiskamanchou, kendansadek, hag eur c'haër a laz-kana, brezonek ha gallek, en Koat-Karantez, stok d'ar gearik, ribl ar ster. Ouspenn 5.000 a dud a oa eno, entanet holl. Botrel ha Giblat deuz Dinan en gallek, Taldir, Iann Perrot deuz Kastellin, ha Banniel deuz Keraez en brezonek, o deuz dispaket dirag an engrouez soniou nevez ha re goz. Botrel ha Taldir o deuz great d'ar Bobl *tou* (en eur sevel an dorn) 1) miret ar gizio, 2) miret ar iez.

An Estourbeillon an neuz great eur brezegen gaër en enor d'ar vro, ha roet eur vedalen arc'hant da rouanezik ar Bleun-Lann. Ar gouel diankouaüs-ma a zo bet klozet dre eur pred braz, en pehini eo bet kanet soniou Botrel, ha da echui an traou, ar *Bro goz ma zadou* a zo bet kanet ha diskanet ive gant an daou c'hant koanier a oa eno er pred.

An aotrou Doue an neuz amprouet pasianted Breiz ; rei a rei d'ezhi prestik ar viktor var he enebourien.

## IX<sup>ved</sup> Kendalc'h ar Vretoned en Kastell-Paol-a-Leon

Programm ar Gouelioù braz a vo great en kear Gastell diouz an 9 d'ar 15 a viz Gwengolo, a zo bet planiet da vad evid ar sizun.

Sethu ama eur c'hrennad dioutan.

*Devez kenta, Sadorn, 9 da h. 1/2.* — Ar C'hendalc'h a vezo digoret dindan ar C'hoc'hi, dro brezegennou gant an Estourbeillon, penn-rener, ha Meriadec Lantivy ; goudeze dre ganaouennou gant ar Varzed, Taldir, Mab an Argoat, Alc'houeder Treger, Telen Aour, Herriou, Barz Melen, Abalor, Ar Pagan, Ar Garrek, etc.

*Eil devez, Sul, 10,* diouz ar mintin bodaden ar Gendalc'herien en Ti-Kear.

Goude kreizdeiz, a ier da ziarbenn *Paotred St-Martin-Montroulez* ; dustu goude, e vezo kanet ar *Bro goz ma zadou* var blasen an Iliz, gant ar muzik hag an holl. Da 3 h. 1/2 kaniri a vezo dindan ar C'hoc'hi. Displeget a vezo *Ar gwir treac'h d'ar gaou*, trajedien nevez, gant *Paotred St-Martin*.

Da 8 h. an noz, ar Varzed a grogo da gana.  
*Tride devez, Lun, 11, da 8 h. 1/2.* — Bodaden labour en Ti-Kear.

Da greizdeiz, konkour braz evid ar c'hezek. Prizioù ha medalennou a vezo roet gant ar *Gevredigez*.

Da 4 h. seanz labour, ha da 8 h. kanadek.  
*Pevar devez, Meurz, 12.* — An deiz-ma, ar Gendalc'herien hag an holl a c'hoanteo, a ielo holl kevred da bourmenn da Gerouzere, Kergounadec'h, Plouescat, Sant-Nouga ha Kerian.

Da 2 h. en porz kastell Kerian, *Paotred St-Nouga* a zisplego peziou brezounek.

*Pemped devez, Merc'her, 13.* — Goude eur seanz labour da h. 1/2 mintin, ar Gendalc'herien a ielo da bourmenn bete Rosko, var dro 10 h. En Rosko e vezo debret meren ; goudeze e teufer da ober *Gorseedd Barzed Gorenez Breiz* var dol-ven Karaval, hanter-hent etre Rosko ha Kastell : Barzed nevez a vezo urzet.

*C'houec'hved devez, Iaou, 14.* — Hema vezo an deiz diveza euz ar gouelioù. Diouz ar mintin e vezo vot evid renevezi Bureo ar *Gevredigez*.

Goude kreizdeiz, e komanso eun diskuezadek vraz a gezek, gant ar *Société Hippique* hag ar *C'homice*.

Da 4 h. Kevredigez Vreiz a roio prizioù d'ar re o devo-gouneet anezo er c'honkourioù hag ar gourenadegoù.

Eur Goan vraz etre an holl a glozo an naoved kendalc'h.

## Leorlennadur

Ar *Gwir treac'h d'ar Gaou*, trajedien en II arvest, gant **Leon Ar Berr (Ab Alor)** ; eul leor golo ru a 168 enebenn, gant ar Brezonek *krec'h ar pajennou*, ar *Gallek d'an traon*. E ti Ar Berre, en *Ergue-Vihan*, tost da *Gemper*, pe e leordi An Dault, 6, rue du Val-de-Grâce, Paris. — **Priz, 6 real.**

Gant al leor nevez-ma, Teatr Breiz-Izel a zo kresket deuz eur pez ouspenn, hag unan deuz ar re vrava. Evel ma lavar An Estourbeillon er c'hent-skrid a zo moulllet arok ar pez : « Ar c'hoariaden dudius-ma, emezan, a erru en he c'houlz, be-zit asur, ha respont mad a ra deuz gortoz kalz a sperejou pouellus, pere ne oant ket hep eun tam aoun da weled hon Teatr poblus brezonek, chalmer an dud, o chom klenket ato e-touez zujeoù historiek pe buezioù Sent, a zablante beza e vammennou beteg-henn. »

Ia, pez-teatr Ab Alor an neuz an dra-ma a vad tre, a-toueat eo er meaz deuz ar c'hiz koz, hag antreal a ra krak en eun doare nevez omp neubeud boazet d'ezan beteg vrema.

Ar c'hoariaden a dremenn en eur vilajen a Gerne pe a leac'h all en Breiz-Izel. Eun Aotrou hanvet Glen, deuz a-bellbro, a zo 'n em gavet da dapout fianz an tiek koz Alan, ha hanvet eo bet da vaer var ar barrez. Dizoue eo ha divreton. Alan, an neuz eur verc'h intanvez, hag eur verc'h vihan. Glen a zo hanvet mirour d'ar verc'h vihan, hag esa a ra distrei he danve. Mez an traou n'aint ket buan awalc'h d'e zonj ; eur sulvez. 'pad an oferen-bred, e skuill poezon barz ar souben. Mez unan a oa dreg ar speuren o sellet, eur soudard deut d'ar gear goude e gonje, Ar Barz e hano. Ar Barz a ra zablant da nompaz gouzout an dro ; dond a ra en ti, ha kont a zav etrezan, Glen hag ar mevel Herveik, divar-benn Breiz, ar Brezonek, an Traou a vrema. Er c'heid-ze, ar soudard a gas unan d'ar bourk da breven ar jandarmed. P'eo digouezet an dud d'o lein, hag eat deuz taol, Ar Barz a lavar da C'hlen tanva ar souben. Hema na c'houl ket. Ar Barz a ziskuill neuze an treitour, pehini zo ereet gant an archerien, ha haroet gant ar bobl, rag nevez gourc'hemennet en doa serri ar chapellou er barrez. Alan goz a wel pegen sod eo bed o rei digor ha fianz d'eun estranjour evel Glen ; trugarekaat a ra ar Breton mad Ian Ar Barz, ha rei a ra d'ean e verc'h en priadelez.

Setu aze ar pez ; mez var ar stern-ze a zo kempennet meur a gozeaden deuz an dudiusa. Eun tam eo pounner ar brezonek impliet gant Ab Alor, mez kement-se a zo eur si disterik en eur pez-teatr ken talvoudus ha ken planiet mad hag eo evidomp *Ar Gwir treac'h d'ar Gaou*. Salo ma heulio kalz a varzed an' arouden-ze !

TALDIR.

## ALI :

Gant *Ar Bobl* euz an 9 a viz Gwengolo e vezo roet evit netra eur bapereñ gaër, varnhi poltrejou 10 Barz breizad, ha 7 kanaouen vrezonek.

### Paëroniez "AR VRO"

An Aotrou N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMON. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOUEL.

---

### HANOIOU SKRIVANIERIEN "AR VRO"

---

**Iez Gwened.** — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Efflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Loëiz Herriou (Barh labourer). — Pengeuik.

**Iez K. L. T.** — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Bruger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodet) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerglaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — An Du. — Eñnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Furcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Efflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Orain. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — F. R. Plouescat. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Renan Ar Rouz. — Jord Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin.

---

---

MOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU E KERA EZ (Penn ar Bed)

---

Le Gérant: Etienne JACQ.

*Le Gérant: E. Jacq*